

# Al lochennig e-tal ar mor

Me ' a - na - vez ul lo - chenn, ul lo -  
chen - nig e - tal ar mor, E gou - dor an  
te - venn, e - kreiz ar c'her - reg noazh, Hag  
e - no e kar - fe din be - vañ 'hed ar  
bloaz, Hag e ve - fen e - vu - rus, va u - na - nik di -  
rak va dor.

1  
Me ' anavez ul lochenn, ul lochennig e-tal ar mor,  
E goudor an tevenn, e-kreiz ar c'herreg noazh,  
Hag eno e karfe din bevañ 'hed ar bloaz,  
Hag e vefen evurus, va-unanik dirak va dor.

2  
Hag e vefe va c'halon bepred yaouank ha yac'h ha sioul,  
O klevout al lanv hag an avel war ar run,  
O kanañ dalc'hmat dre va labour, dre va hun ;  
Hag ar gouelan o plavañ hag o wikal gouez war an houl.

3  
O na skuizh on gant safar ha gant tregas ar c'hêriou bras,  
Na skuizh oun o vont dre al lantar hag ar glao !  
Er bed kriz ha yen-mañ, hirvoudiñ 'ran atao  
D'am lochennig ken karet, war an tevenn 'tal ar mor glas.

**ROPARZ HEMON.**

*(Hervez un ton a Iwerzhon.)*